

# JEZUZ HA BREIZ

## EURED ILIZ EVIAZ

ER ZEIZVED A VIZ EST 1881

Jezuz, peger braz e  
 Hidiv joa ma ine :  
 N'euz gwelet den biskoaz  
 Kaeroc'h de enn Eviaz !

Joaïou warlerc'h glac'har,  
 Eviaziz mad. c'houi oar.  
 Evel-se man ar' bed :  
 Joaïou ha kaon mesket.

Jezuz, peger braz e  
 Hidiv joa ma ine !  
 N'euz ket kerkoulz blazet  
 Evel joaïou prenet.

War don : *Renean ar C'hlaz.*

Labourer 'n euz poan gand ann here  
 A gan oc'h ober he leur neve.

Da zavel ken huel hoc'h iliz,  
 'Zo bet labour ha poan, Eviaziz.

Poan zo bet, ha poan zo tremenet ;  
 Gwastel omp ! Doue da vo meulet !

Jezuz, peger braz e  
 Hidiv joa ma ine :  
 N'euz gweled den biskoaz  
 Kaeroc'h de enn Eviaz !

War don : *Chileet gant spont hag estoun.*

Me glev o son uz d'ar zaouenn,  
 Me glev klec'hi o son laouen.  
 « Hidiv, eme, vo binniget  
 « Bravan iliz zo bet zavet  
 « Bravan iliz a zo er vro,  
 « 'Nu hon broik koant,enn bro Goëlo.  
 » A vezo hidiv eureujet  
 « Gant hon Eskop mad ha karet. »  
 Sonet, klec'hi, zonet bepred !  
 Me wel a bep tu o toned.  
 Me wel a bep pro Eviaziz  
 O tond da eured ho iliz.  
 War an dro gant-he me wel c'hoaz  
 Me wel koz veleien Eviaz :  
 Nann, nann biken n'ho ankouain  
 'Vit ann oll vad ho deuz gret d'in !

Na perag ne welan aman  
 Eur person-all hag a garan ?...  
 Otro Fustek, c'houi a glevo  
 Ec'h, oc'h bepred karet 'nn hon bro.  
 Enn Eviaz, me welfe zeder,  
 Me welfe ann otro Bonner.  
 Enn Eviaz n'em dislaro den ;  
 Me lar eo bet tad hon fevien.  
 Eunn-all zo deut, anavet mad,  
 Pe 'n eo bet c'houezek la hon zad.  
 Eviaziz, n'hon bemp ket aon ;  
 Ni zo bepred tamm he galoo,  
 O kuitat ho parrouz Eviaz,  
 Otro Rolland, c'houi a ouelaz.  
 Allaz ! ni a ouele ive  
 Eunn tad wel-vad d'he vugale.  
 Kalz-all a zo bet ankouaet  
 Aboue m'hoc'h euz hon c'houitaet ;  
 C'houi ne vefet ket, pe laran,  
 Ann tad koz a ve zonzj ann-han,

De mad ha joa a greiz kalon  
 D'otro Prijent hon c'hoz person !  
 N'ankouafet biken, Eviaziz,  
 Ar boan 'n euz bet gand hoc'h iliz.

Aliez e zo bet laret :  
Eviaziz a zo tud kaled,  
'Vit ho beleien tud ingrat :  
C'houi wel breman piou zo gaouiat.

Jezuz, peger braz e  
Hidiv joa ma ine :  
N'euz gwelet den biskoaz  
Kaeroc'h de enn Eviaz !

War don : *Kantik tant Visant Gwengam.*

Chilaouet, inea mad, pezh em euz gwelet fenez,  
Pe 'n euz zonet ar c'hloc'h braz nao dol war dro hanter-noz,  
Pe n'euz zonet ar c'hloc'h braz nao dol 'vel da greiz-de,  
Chilaouet pezh a gleviz enn ho perred neuze.

Eur vouez em euz-me klevet, hag eudn den en euz laret :  
« Sonet, klec'hi, emean, enn hano Doue, sonet !  
« Hag e teio ar re varv, rog ma vo golo-de,  
« Da verzan 'vel ar re vev eured iliz Doue. »

Hagar c'hlec'hi 'n euz zonet evel ne sonnont biskoaz,  
Ha gand anaon ar barrouz e oa lan berred Eviaz.  
Euz boark Kerfot e teuent, hag euz pep korn ar bed,  
Da bedi war ann douar lec'h m'int bet badeet.

Bean oa menez'h a-leiz hag a-leiz a veleien,  
Bean oa leanezed, tud-jentil ha bourc'hijenn,  
Ha tado ha mammo fur gant-he ho bugale.  
Hag oll e kanent ker kaer : *Meulet da vo Doue !*

Nav beach en eur ganen ho deuz gret tro ar verred.  
Dom Per Loranz Montroulez gand ar groaz em euz gwelet.  
En eur rei ar mision aman varvaz Dom Per,  
Goude bean dre ar vro geuillet ann Tad Maner.

Goude gant peb a cholo e teue ar menez'h gwenn,  
Menez'h gwenn ann Abatti oa gwech-all hon beleien ;  
Ha warlerc'h Person Zan Jeg, Augustin Ar Sere  
E kanent oll a-unan : *Meulet da vo Doue !*

Me wel gant Manac'h Durand zo bet enn Jeruzalem,  
Me wel eur mabik Jezuz 'n euz douget euz Betleem,  
Douget da chapel Kerfot, enon c'hoai hen gwelfe.  
Kanan 'ra vel ar re-all : *Meulet da vo Doue !*

Pevar veleg 'm euz gwelet warlerc'h re ann Abatti,  
Ho fevar bet enn Bro-Zoz kentoc'h evit treitouri,  
Kentoc'h 'vit bean treitour da Jezuz ha d'ho fe,  
Ha joauz braz e kanent : *Meulet da vo Doue !*

Dom Fransez Richard a oa ha Dom Fransez Ar C'halve,  
Beau oa Dom Iann Derrien hag ann otro Ar C'here,  
Enor ho farrouz Eviaz ar pevar veleg-se,  
A gan joauz ho fevar : *Meulet da vo Doue !*

Eun-dro d'ann otro Richard oa daou renkat skelerien,  
Deut da goléj bourk Eviaz evit bean beleien ;  
Ha skelerien Landreger gand otro Ar C'here, (4  
A gane , vel re Eviaz : *Meulet da vo Doue !*

Goude merzerienn ar vro, gand ar Revolution,  
E oa Dom Alan Durand o kanan a greiz kalon,  
War levr *Ar Fe hag ar Vro* Dom Alan a gane,  
Hag enn brezonek divesk : *Meulet da vo Doue !*

Chetu ann otro 'nn Eskop hag otro Richard Kemper,  
Chetu 'nn otro Goudelin bet hon ferson pell amzer,  
Chetu Manac'h Ar Solu ha Bougeant hon c'hure ;  
Kanan 'reont hag huel : *Meulet da vo Doue !*

Chetu 'nn otrone Gwezou, ha Poezel ha Pariskoat,  
Ha Derrien hag Ann Normand hag Ar Rous. koz person Prat,  
Gant-he Person Landreger, ann otro Durand e,  
O kanan vel ar re-all : *Meulet da vo Doue !*

Tremenet ann Otro Floe'h, tad hon c'hlec'hi. Eviaziz ;  
Chetu ann otro BAHIER, he-man eo tad ann iliz,  
Heman en euz bet ar boan, ha heman a gane ,  
Kanan 're dreist d'ar re-hall : *Meulet da vo Doue !*

Warlec'h ann otro Bahier, rag hen a oa ar person,  
Em euz gwelet hon zud koz ebarz ar prosesion.  
« Arc'hoaz, eme unan nn-he, ni a gano enn Ee,  
« Ni gano gand Eviaziz : *Meulet da vo Doue !* »

Ia, meulet da vo Doue ! Eviaziz mad, c'houi laro :  
Done en euz d'imb roet kaeran iliz zo er vro.  
Bemp tui evit hon zud koz, bemp stard ebarz hon fe,  
Ha kanomp bete mervel : *Meulet da vo Doue !*

---

(1) Ann otro Ar C'Here eo Superior kentan koléj Landreger.

Jezuz, peger braz e  
Hidiv joa ma ine :  
N'euz gwelet den biskoaz  
Kaeroc'h de enn Eviaz !

War don : *Ma Doue, me gred fermamant.*

O ! ia, me lavar da Jezuz :  
C'houi zo eunn tad trugarezuz !  
D'am Eskop mad me lar ive.  
Me lar da viken TRUGARE !

Miret er vad 'nn ho kalono,  
Eviaziz, miret he hano ;  
Ha d'ho pugale e larfet  
Hano hon Eskop binniget.

Trugare a greis ma c'halon,  
Trugare d'hac'h otro Person !  
Hag enn hano parouz Eviaz,  
Otro kure. trugare c'hoaz !

Jezuz, peger braz e  
Hidiv joa ma ine :  
Brasoc'h c'hoaz e vezo  
Eunn devez enn Envo.

DRASKIK KERAMON.

④